



BEZAÑ  
DALC'HET  
GANT AR  
POLIS

\*

ALIOÙ

*A-raok*

*E pad*

*Goude*



# BEZAÑ DALC'HET GANT AR POLIS

ALIOÙ

A-RAOK

E-PAD

GOUDE



## SKOAZELL VREIZH

SECOURS BRETON

Comité de Soutien aux familles  
des détenus politiques bretons

Association déclarée conformément à la Loi du 1er Juillet 1901  
(J.O. du 24-1-1969)

### PALIOÙ

- Reiñ harp buhezel ha skoazell arc'hant da diegezhioù an doullbac'hidi vrezhon.
- Reiñ harp buhezel ha skoazell arc'hant d'ar stourmerien toullbac'het.
- Paeañ mizoù ar vreutaerien da geñver ar prosezioù savet ouzh ar stourmerien bolitikel ha sevenadurel.
- Reiñ da c'houzout d'an holl e vez gwasket hag heskinet ar re a stourm evit ma vo roet he gwirioù politikel ha sevenadurel da Vreizh.

© SKOAZELL VREIZH - 1996  
Pep strizh miret.

SKOAZELL VREIZH  
Feunteun Wenn - 3 straed Aristide Briand  
44350 GWENRANN - BZH  
Pell. : 40.42.92.92 / 40.42.95.20 - Fax : 40.24.81.38 / 96.38.42.65  
Bank : CMB - Kont N° 15589 56983 00976964044 08

*N'emaomp ket e soñj, gant al levrig-mañ, da zont da zirouestlañ an holl gudennoù a zeu da heul bezañ dalc'het gant ar polis. Evit unan n'en deus ket bevet se e c'hall bezañ ur mare diaes-tre da vevañ. Hor pal nemetañ eta eo kinnig un nebeud elfennoù diazez evit ma vo aesoc'h deoc'h ha d'an dud nes ouzhoc'h tremen dre ar mare diaes se, koulz e-keñver spered hag e-keñver korf.*

*A-hend-all e sachomp evezh al lennerien war ar riskloù a vez atav stag ouzh an doareoù da gaout darempredoù. Hep pennfollañ ez eo ret gouzout e c'hall bezañ ho pellgomzadennoù, ho pelleiladennoù, ho peajoù... dindan evezh (hervez al lezenn pe e-maez lezenn) hag e c'hall bezañ implijet disoc'h al labour evezhiañ-se pa voc'h dalc'het gant ar polis.*

SKOAZELL VREIZH

## A-RAOK

Delc'her un den e burevioù ar polis zo un doare psikologel, polisel ha diouzh al lezenn da waskañ warnañ en ur c'hoari gant darvoudoù fizikel evel chom hep bezañ gouest ken d'en em lec'hiañ en amzer hag en egor, ar skuizhder, ar santad bezañ lous. Ur pal zo d'ar gwaskañ-se : ar gwanaat hag an em izelaat. En em soñjal evit chom hep bezañ mezhekaet, evit kompren e peseurt korventenn e klasker ho kas a c'houlenn gouzout tamm-pe-damm petra eo bezañ harzet gant ar polis ha penaos bevañ diouzh ar gwellañ an eurvezhioù hir-se betek bezañ dieubet pe bezañ lakaet en toull.

## E-PAD

Prientet hoc'h eus ho malizennig ha kregiñ a rit ho prantad e dalc'h ar polis. Ur reuziad eo e gwirionez bezañ dalc'het gant ar polis. Ur maread eo ma vo klasket ho lakaat da goll ho mestroni warnoc'h hoc'h-unan, dre wanaat ac'hanoc'h en ur virout ouzhoc'h a gousket dreist-holl : ur plankenn evit gourvez, ur pallenn kozh a-wechoù ; gouloù ha trouz hep tamm ehan ebet. E komiserdioù zo e c'hallit en em walc'hiñ met ral eo. Ouzhpenn an enkreuz a ya gant an harzadenn, an emskiant en devezer eus e bersonelezh, ar c'hoant da chom dereat a vez lakaet diaes gant ar skuizhder hag an diouer a aezamantoù d'en em walc'hiñ.

Ret deoc'h kompren ez eo kement-mañ ul lodenn eus un argerzh, kement hag ur c'houlennadeg.

Un doare all da waskañ : gortoz, an amzer o tremen. Eurvezhioù, devezhioù da c'hortoz, bac'het en ur

seurt armel (kellig), gortoz e vefec'h lakaet da vont er-maez an amzer da zebrif ur sandwich pe da vezañ goulennataet. Peurrest an amzer e voc'h lezet hoc'h-unan, gant ho soñjoù, o selaou pizh trouzoù an diavez evit klask divinout ar pezh zo o tont.

Klaskit, ar muiañ posupl, divoustrañ, kousket kerkent ha ma c'helloc'h. Na chomit ket da soñjal en hoc'h enkreuz, ha peadra zo da vezañ enkreuzet, met klaskit kentoc'h sellet ouzh ar bed nevez-se evel un tudoniour, kavit un dra bennak da ziverrañ hoc'h amzer, forzh petra e vefe.

Lous ha skuizh, en em santout a rit gwan, izelaet... Setu dres ar pezh e oant o klask ! Stourmit outo !

## GOUDE

Ma'z eus bet embannet ur c'hemenn degas a-enep deoc'h e voc'h kaset da Baris dirak ar barner-enklasker. Peurliesañ e veajer en ur c'harr e-giz ar re all pe en ur c'harr-boutin C.R.Sed ; beaj displijus a reoc'h peurliesañ gant grizilhonoù.

Pa voc'h en em gavet e Paris, en ur c'hortoz bezañ kaset dirak ar barner, e voc'h kraouiet er vac'h, e danzouar al lez-varn evit eurvezhioù hir. He roll he deus ivez ar vac'h er youl d'ho kwanaat e-keñver spered : bez' ez eus anezhi ul lec'h bras-bras, kozh, teñval, lous, trouzus, doare ur c'harc'har dezhañ ma voc'h serret gant defallidi a bep seurt. Evel er c'homiserdi e voc'h o c'hortoz... An amzer o tremen a gont evidoc'h met ket evit ar re zo ouzh o telc'her. Evito n'eus netra reishoc'h. Kaset e voc'h betek an "identité" : pep biz hag an daou

zorn en o fezh el liv, luc'hskeudennoù. Gwallañ ho puhez prevez, ho puhez deoc'h-c'hwil eo an "identité". E fichennaouegoù ar P.J. emañ ho skeudenn bremañ.

Aergelc'h ar vac'h : youc'hadennoù, kunujadennoù, galvadennoù drammedi war yun, trouzioù metal an alc'hwezioù, an dorioù, an treuzelloù. An eveshaerien ne reont forzh ebet ac'hanoc'h : o labour eo digeriñ ha serriñ dorioù, ho kas eus ul lec'h d'un all. Komzet e vez ac'hanoc'h, dirazoc'h, d'an trede gour... Atav an hevelep argerzh evit moustrañ, dizenekaat.

Er vac'h e vez un tamm gwelloc'h stad ar merc'hed eget hini ar baotred. Kelligoù unden un tamm naetoc'h ha leanezed a ginnig deoc'h ur gerig kennerzhañ, ur mousc'hoarzh.

C'hwezh ar c'hoc'hion ha reuzeudigezh mabden a chom atav gant ar vac'h avat.

Evit en em gavout el lec'h ma voc'h karc'hariet e veajoc'h en ur c'harr-bac'h. Diaes-kenañ e vez beajiñ en ur seurt karr. Klaskit divoustrañ ar muiañ ar gwellañ, en em lakaat mat en ur c'horn evit chom hep kaout c'hoant dislonkañ (Bez' e c'hall ar c'harr-bac'h mont da veur a garc'har hag e c'hall ar veaj padout muioc'h eget un euvezh).

Pa voc'h oc'h en em gouvout en toull-bac'h soñjit emac'h oc'h erruout en ul lec'h ma c'helloc'h en em walc'hiñ, kousket, skrivañ, adapout hoc'h aferioù. N'eo ket ul lec'h dreist na dispar met bez' e c'helloc'h kregiñ da adapout nerzh.

Araok-se avat, e reoc'h anaoudegezh gant sistem an toull-bac'h dibersonel ha mezhekaüs. Du-hont ivez e kevoc'h komz ac'hanoc'h en trede gour, ne glasker ket gouzout da gentañ perak oc'h bet kaset d'an toull-

bac'h, renablet e vo hoc'h aferioù personel ha sellet pizh e vo outo, lakaet e voc'h d'en em lakaat en noazh-ran. Mat eo gouzout e tiwisker alies dirak tud dianav en toull (da-geñver pep gweladenn, pep dilec'hiadenn bersonel, evit furchadennoù dic'hortoz, evit ar strinkadennoù a-stroll) ; an dilhad, an dilhad-dindan, ar blev a vez ensellet. Da vare an dilec'hiadennoù "reizh" (pourmenadenn, gweladenn velestradurel pe vezegel) e voc'h palvataet bep tro met ne voc'h ket furchet. Un dra all c'hoazh : an devezh kentañ pe an eil hini ma voc'h en toull e voc'h gwelet gant medisin an toull-bac'h. Bez' e c'halloc'h kregiñ da adsevel hoc'h enor bet gwallgaset en ur nac'hañ an arnodennoù ha dreist-holl al louzoù-sioulaat hag al louzoù-kousket a vo kinniget deoc'h.

Echu eo bremañ an tremen dre an "dizourez vras" a ya d'he ober an dalc'hadenn gant ar polis, ar vac'h hag an treuzkas. Poent eo bremañ adapout, klask gwelet an traoù war an tu mat evit ober diouzh ar gwellañ gant ar pezh zo da zont ha gant bed an toull-bac'h.

\* \* \*

\* \*

\*

## HARZADENNOÙ DARVOUDOÙ-GWIRIOÙ-ALIOÙ

### BEZAÑ HARZET

Ar polis en em gav, gantañ kemenn ar barner, a aotre ar furchadeg.

- Alioù :** - chom hep digeriñ  
- ober e vad evit reiñ da c'houzout ar pezh a c'hoarvez ganeoc'h  
- lezel un alc'hwezer da zont.  
- gwiriañ lizheroù-kemenn ar bolised.

### FURCHADEG

Goulennit groñs e vefe graet **dirazoc'h**, sal ha sal.

Mar bez distrujet tra pe dra pa zeu ar polis tre en ho ti pe e-doug ar fuchadeg goulennit e vefe notennet er skrid-danevell. Kerkent ha ma ya kuit ar polis e tle an dud tro-dro deoc'h soñjal lakaat stadañ an distrujoù gant un urcher ha tennañ luc'hskeudennoù. Kement-se a roio an tu deoc'h da sevel klemm diwezhatoc'h.

### BUHEZ PLEUSTREK

**Pa voc'h o kuitaat ho ti evit mont e dalc'h ar polis :**

Soñjit kas ganeoc'h : ur sac'h pe ur valizenn  
un nebeud pezhioù dilhad  
peadra d'en em walc'hif  
un tammig arc'hant (300 pe 500 lur)  
aper, goloioù-lizher, timbroù,  
montr  
botoù hep lasoù

ho teuliad yec'hed  
dilhad tomm  
ur gartenn bellgomz

### ATERSADEGOÙ

Roit da c'houzout piv oc'h.

**Aotreet oc'h gant mellad 62 an dezveg kastizañ da chom mut keit ha ma voc'h dalc'h het gant ar polis ha dirak ar barner.**

Goulennit ur jubennour mard oc'h gant tud na ouzont ket brezhoneg.

### BEZAÑ DALC'HET GANT AR POLIS

Dalc'h et oc'h gant ar polis adalek ar mare ma teu polised tre en ho ti.

**Dalc'h et e c'hellit bezañ :**

- 24 eurvezh
  - 48 eurvezh ouzhpenn = 72 e.
  - 24 eurvezh ouzhpenn c'hoazh = 96 e. :
- ar muiañ tout eo.**

**Gwirioù :** e-kerzh ar 24 eurvezh kentañ :

- gwelet ur medisin
- kemer e louzeier (mard int bet roet gant ur medisin).
- lakaat kelaouif e implijer pe e familh

**Mar bez hiraet an dalc'hadenn en tu-hont da 24 e :**  
Pa echu an 72 eurvezh kentañ, gwir da welet un alvokad (30 munut). Goulenn sellet ouzh roll an alvokaded a rank bezañ tu da ginnig deoc'h.

**Pa echu ar 96 eurvezh :** n'hellit ket bezañ dalc'h et

### pelloc'h :

- dieubet oc'h pe ez oc'h kaset dirak ur barner.
- mard oc'h kaset dirak ur barner e c'hall 3 zra c'hoarvezout :

\* n'hoc'h ket tamallet hag ez oc'h lezet da vont dieub

\* tamalet oc'h met lezet oc'h da vont dieub

\* tamalet ha toullbac'het oc'h.

- Gwir da vezañ skoazellet gant un alvokad.

### REOLENNOÙ DA HEULIAÑ

#### PA VOC'H DALC'HET GANT AR POLIS

##### **Chom mut eo ho kwellañ difenn**

Ha pa vefe :       testenioù ouzh ho tamall  
tud lakaet da lavaret ar c'hontrol  
eus ar pezh a lavarit.  
drouktunerezh ha gwask  
gourdrouzoù.

Leitmotiv : "na'm eus netra da ziskleriañ". **Soñjal mat er pezh a lavarer ha chom hep kaout aon.**

Evañ : dour ar c'hog hepken (abalamour d'an dram)

Debriñ : chom hep debriñ (abalamour d'an dram)

Emzalc'h : chom hep sevel pa vezer skuizh.

Digoret e vez ur marilh ispisial "dalc'hadennoù"

- Warnañ e vez skrivet : an eurvezhioù atersañ  
an eurvezhioù diskuizhañ

Gwiriañ mat e vez skrivet pep tra.

Mar bez gant unan a vez dalc'het gant ar polis ur vicher a redi anezhañ da gaout ur fichennaoueg kuzh (medisin,

alvokad, apotiker) e tle goulenn bezañ un ezel eus urzh e vicher evel evezhier e-pad ar furchadeg.

#### Mar rankit bezañ kaset dirak ar barner :

Nac'hit sinañ marilh dibenn an dalc'hadenn.

Na sinit paperenn all ebet.

### MAR BEZIT KASET DA BARIS

Lakait kelaouiñ SKOAZELL VREIZH pe un alvokad kevrataet gant Skoazell Vreizh. Peurliesañ e klasko ar polis pe ar barner mirout ouzhoc'h a ober kement-se. Dalc'hit start, d'ho kwirioù.

### DALC'HIT SOÑJ

Kement tra a vo lavaret pa voc'h e dalc'h ar polis pe dirak ar barner a vo miret enep deoc'h hag a c'hello kaout heuliadoù grevus evit tud all.

#### **TEVEL ETA.**

Kit kuit o krediñ start n'oc'h ket kablus.

Pa zeuit en-dro d'ar gêr :

N'ho pet ket mez.

Komzit gant kazetennerien ar c'hazetennoù, ar skingomz, ar pellwel evit sevel a-enep ar fed e vefec'h bet harzet. Diwallit avat, o paouez bezañ e dalc'h ar polis emac'h, skuizh eo ho korf hag o spered. Ar stad-se a c'hall cheñch ho toare da brederiañ ha lakaat ho komzoù da vezañ treuzkomprenet gant ar mediaoù.

**Doare da gaout darempredoù etre ar bed diawaez hag an toull-bac'h :**

#### **Radio BRO : 93.1 FM**

D'ar gwener etre 15 eur ha 17 eur

D'ar gwener etre 21 eur ha 00 eur

D'ar sadorn etre 10 Eur ha 12 eur

## **I. PETRA EO BEZAÑ DALC'HET GANT AR POLIS**

*( Melladoù 63 ha 706-23 Dezveg an Argerzhadur Kastizañ )*

Bezañ dalc'het e ti ar Polis Broadel pe en un Archerdi evit testeniañ eo bezañ dalc'het gant ar polis.

A c'hell bezañ dalc'het gant ar polis kement hini a c'hell pourchas titouroù evit un enklask war ober pe war traoù pe deulioù bet kemeret e-doug ur furchadeg.

An atersañ a ya da heul ar fed bezañ dalc'het. Gant unan pe meur a ofiser polis-barn e vez graet, an eil o c'hellout kemer tro egile.

N'eus testenn ebet o vevenniñ an niver a enklaskerien a c'hall bezañ oc'h atersañ war un dro.

Ur goulenn a zeu diouzhtu war ar spered : pegeit e c'haller bezañ aterset ?

## **II. PEGEIT E C'HALLER BEZAÑ DALC'HET ?**

*( Melladou 63 ha 706-23 Dezveg an Argerzhadur Kastizañ )*

- Ma ne vez tamm tra ebet a-enep an den dalc'het o lakaat da soñjal en deus graet pe en deus klasket ober un dra bennak a-enep al lezenn ne c'hallo bezañ dalc'het nemet an amzer ret evit e desteni.

- Mar bez un dra bennak o tiskouez ez eo kablus an den e c'hall bezañ dalc'het pell pe belloc'h hervez ar pezh a vez rebechet.

### **A- AN TORR-LEZENN A WIR KUMUN**

24 eurvezh e c'haller bezañ dalc'het gant ar polis.

Hiraet a 24 eurvezh e c'hall bezañ ar prantad-se diwar



aotre dre skrid prikolor sar Republik (aotre delc'her hirann gant un aotre : 48 eurvezh).

Pa n'eur ket mui evit delc'her an dud, ar re a zo en o enep peadra d'o zagañ a vez dieubet pe kaset dirak an Aotrou Prokolor ar Republik pe ar Barner-Enklasker (an eil martezeadenn pa oa bet dalc'het an dud e framm un enklask barnerezhel war ober).

## **B- AN TORR-LEZENN SPONTEREZH**

Pa echu maread ar gwir kumun hiraet e c'hall c'hoazh un den tamallet dezhañ bezañ kemeret perzh en un embregadenn sponterezh bezañ dalc'het 48 euvezh ouzhpenn (4 devezh d'an hirañ tout en holl).

Bez' e rank an astenn-se goulennet gant Prokolor ar Republik bezañ aotreet pe :

- gant Prezidant al lez-varn a vez graet an dalc'hadenn dindan e atebegezh.
- gant ar Barner-Enklasker bet fiziet an enklask ennañ.

A-raok an astenn e rank an den e kont bezañ kaset dirak ar Reizhaouer a ro e aotre evit an dalc'hadenn.

\* \* \*

\* \*

\*

En ur seurt plegenn daoust ha gwirioù a chom gant an den ?

Penaos e c'hall o lakaat da dalvezout ?

### **III - GWIRIOU AN DEN DALC'HET GANT AR POLIS**

Lakaat pellgomz d'unan bennak eus e familh, komz gant un alvokad goude ur pennad amzer, gwelet ur medisin, nac'hañ testeniañ, nac'hañ sinañ ar skrid-danevell.

**A. GWIR DA C'HOULENN E VEFE PELLGOMZET D'UNAN BENNAK A VEZ O VEVAÑ GANT AN HINI DALC'HET, PE DA UNAN BENNAK KAR-TOST DEZHAÑ, DA UNAN EUS E VREUDEUR PE C'HOAREZED, PE D'E IMPLIJER EVIT E GELAOUIN̄ EMEUR OUZH E LAKAAT E DALC'H AR POLIS.**

*(Mellad 63- 2 Dezveg an Argerzhadur Kastizañ)*

Ma nac'h an Ofiser Polis Barnerezhel (polis pe archer) degemer ar goulenn-se e kelaou Prokolor ar Republik a c'hall-eñ e zegemer.

Ar goulenn evel ar respont roet hag an niverenn galvet a vez skrivet er skrid-danevell.

Gant un enklasker e vez pellgomzet ha n'eo ket gant an hini dalc'het gant ar polis.

Pa vez an hini dalc'het ur minor koshoc'h eget 13 vloaz e rank an Ofiser Polis kelaouiñ an hini zo an aotrouniezh kerentel gantañ.

**B - GWIR DA VEZAÑ GWELET GANT UR MEDISIN**

*(Mellad 63-3 Dezveg an Argerzhadur Kastizañ)*

An hini a vez dalc'het gant ar polis a c'hall goulenn gwelet ur medisin. O c'hortoz ar medisin e c'hall an atersañ kendelc'her.

Gwelet ur medisin un eil gwech a c'hall bezañ goulennet mar bez hiraet an dalc'hadenn.

Gwir zo da welet ur medisin mar bez hiraet an dalc'hadenn a 48 euvezh evit abegoù a sponterezh.

An ezel eus ar familh bet kelaouet a c'hall ivez goulenn e teufe ur medisin.

Ha p'o defe Prokolor ar Republik pe an Ofiser Polis Barnerezhel lakaet ur medisin da zont, an hini a vez dalc'het, pe unan bennak eus e familh a c'hall goulenn goude e teufe ur medisin dibabet war ur roll roet. Peurliesañ e vez e ti ar polis pe en archerdi e teu ar medisin.

Reiñ a ra ar medisin e soñj da c'houzout ha gouest eo an den da vezañ dalc'het gant ar polis pe ha ret eo e zieubiñ kerkent (ral-ral).

**C - GWIR DA GOMZ GANT UN ALVOKAD**

*(Mellad 63-4 Dezveg an Argerzhadur Kastizañ)*

Pa echu 20vet eurvezh an dalc'hadenn evit un torr-lezenn a wir kumun pe an 72 eurvezh en aferioù a sponterezh e c'hall an hini dalc'het goulenn komz gant an alvokad en deus dibabet pa gant un alvokad dre ziferad.

Bez' e c'hall an alvokad komz e-unan gant an tamallad e-pad 30 munut goude bezañ bet kelaouet war ar pezh a rebecher dezhañ.

Evezhiadennoù dre skrid, a vo staget ouzh an teuliad, a c'hall ober an alvokad hogen ne c'hall ket implijout an emwel-se a-raok dibenn an dalc'hadenn.

Mar n'eo ket an alvokad dibabet evit dont (divak) e c'haller goulenn e vefe diferet unan gant ar Barner. A-

hend-all e talc'ho an enklask da vont war-raok hag ezvezañs an alvokad a vo merket war ar skrid-danevell.

Ne c'hall ket an alvokad tostaat ouzh an teuliad ha n'eo ket ret d'an enklasker e gelaouiñ war abegoù an dalc'hadenn na war ar pezh a zeuio da heul.

Ma echu an dalc'hadenn a-raok emell an alvokad, hennezh ne gemero ket perzh en afer.

Mar ne gomz ket galleg an den dalc'het e vo anvet ur jubennour evit an emwel gant an alvokad hag evit an atersañ.

**\* Gwirioù ispisial :**

Mar n'en deus ket c'hoant an den dalc'het da respont d'ar goulennoù graet outañ en deus gwir da chom hep testenianñ (*Mellad 62 Dezveg an Argerzhadur Kastizañ*).

Degouezh all, goude adlenn ar skrid-danevell, gerioù pe frazennoù a seblant bezañ bet kemmet. Fur e vo neuze chom hep sinañ ar skrid-danevell. Bez' ez eus eus ar gwir-se, implijet e c'hall bezañ (Meneget e vo neuze war ar skrid-danevell).

**IV. GWIRIOU AR RE A ZIVIZ LAKAAT DELC'HER TUD**

Gwir en deus an Ofiser Polis Barnerezhel da engervel unan bennak da destenianñ evit ur ragenklask pe pa vez paket hennezh en e wall.

Mar ne respont ket an den-se d'an engalvadenn, e c'hall Prokolor ar Republik e lakaat da zont dre nerzh.

Gwir en deus an Ofiser Polis Barnerezhel da vont da di nep piv bennak a vez diskred warnañ, pa soñjer e c'hallfe bezañ gantañ traoù e darempred gant ar felladenn pe pa

soñjer en dije gallet kemer perzh enni, evit mont da furchal an ti-se (Etre 6 eur ha 9 eur noz).

Evit ar pezh a sell ouzh ar gwir kumun ez eo ret kaout aotre dre skrid ar perc'henn (ragenklask hepken).

Evit ar pezh a sell ouzh ar sponterezh n'eus ezhomm eus aotre ebet.

An traoù kemeret e-doug ar furchadeg a vez lakaet dindan siell.

### **\* Dleadoù an Ofiserien Polis Barnerezhel**

Skrid-danevell testeni an dud dalc'het a zle bezañ warnañ :

- Abegoù an dalc'hadenn,
- Deiz hag eur an dalc'hadenn,
- An titouroù roet diwar-benn pad an dalc'hadenn ha gwirioù an hini dalc'het,
- An titouroù roet da Brokolor ar Republik pe d'ar Barner-Enklasker,
- Pad pep atersadenn,
- Pad pep maread diskuizhañ etre an atersadennoù,
- Ar gwirioù goulennet gant an hini dalc'het hag ar respontoù roet,
- Deiz hag eur dibenn an dalc'hadenn gant an disoc'h.

*G.S. Mar bez dalc'het unan bennak pa vez c'hoazh un enklask diwar-benn an afer ez eo neuze ar Barner-Enklasker en deus galloudoù Prokolor ar Republik.*

### **UN NEBEUD ALIOÙ PLEUSTREK**

Klevet ez eus bet alies frazennoù dizereat o deus da bal spontañ an hini dalc'het.

Da skouer : "D'an DDASS e vo kaset da vugale", "5 bloaz

emaout o vont da bakañ, ez plas e lavarfen pep tra".

Evit an eil tra hag egile ez eo mat gouzout n'en deus an Ofiser Polis Barnerezhel galloud ebet. N'eus nemet ur Barner evit Bugale a c'hall divizout lakaat ur bugel e lec'h pe lec'h, hag an diviz d'ober tra pe dra da heul goude an enklask zo gant ul Lez-Varn goude enklask ur Barner-Enklasker. Arabat bezañ touellet gant seurt emzalc'hioù eta, n'int nemet drouktunerezh eus ar gwashañ seurt hag a ziskouez un diouer a zivezoniezh.

Mar bez graet anv a gaozeadennoù dre bellgomz e vo mat goulenn e vefe lennet an arroudoù a servij d'ar polis (selaouadennoù).

\* \* \*

\* \*

\*

Bez' e c'hall an enklaskerien herzel nep piv bennak zo diskred warnañ, er gêr pa war e lec'h labour.

Hep gouzout da re a dud e c'haller herzel tud met peurliesañ e tibaber diskouez nerzh (kirri-bac'h, gouleier-tro, niver bras a enklaskerien evit an harzadenn).

N'eus testenn ebet o reolenñ an harzadennoù avat.

Ar barner hag an enklaskerien a c'hall ober e-giz ma karont war zigarez e c'hallfe bezañ dañjerus an dud harzet (grizilhonoù, gourdroz gant un arm).

An hini dalc'het gant ar polis a c'hall goulenn e vefe merket penaos e oa bet harzet war ar skrid-danevell met n'eo ket ur gwir.

Ur mare pouezus-pouezus eo lennadenn ar skrid-

danevell. Pep frazenn, ma n'eo ket pep ger, a c'hall ober ar c'hemm. Ret eo kemer e amzer eta evit lenn pizh ar skrid-danevell.

Mar kav deoc'h ez eus bet lakaet traoù n'int ket gwir er skrid ez eo ret goulenn e vefent reizhet digant an Ofiser Polis Barnerezhel. Ma nac'h ez oc'h aliet a-benn neuze da nac'hañ sinañ ar skrid-danevell evel ma'z oc'h aotreet d'ober gant al lezenn.

Ur maread diaes-diaes e-keñver korf ha spered eo bezañ dalc'het gant ar polis.

Komz gant ur medisin a ro an digarez da zisplegañ e peseurt stad yec'hed emeur ha da lavaret hag-eñ e vez kemeret louzeier.

\* \* \*

\* \*

\*

## EMGLEV

Ar c'hevredad SKOAZELL VREIZH dileuriet gant e brezident ha ..... (anv hag anv-bihan ar siner) a ro o ger da heuliañ divizoù an emglev-mañ :

1 / Ur c'huzul da harpañ familhoù ar re doullbac'het pe harzet evit abegoù politikel breizhek eo ar c'hevredad Skoazell Vreizh.

2 / Oc'h ober diouzh e zibaboù, e zoareoù da zibab hag e beadra e ro e c'her ar c'hevredad Sk-Vzh da skoazellañ ar familh, ha da gemer perzh e mizoù difenn ..... (anv ha anv-bihan) er justis.

3 / Un nebeud alvokaded a vo kinniget gant ar c'hevredad ; mar diviz ..... (anv ha anv-bihan ar siner) goulenn kuzulioù digant un alvokad n'en dije ket sinet un emglev e-keñver mizoù ha briwerzhioù gant ar c'hevredad e c'halla Sk-Vzh delc'her pe get da skoazellañ an tamallad.

4 / Un emglev o tennañ d'ar mizoù emellañ a vo e karg ar c'hevredad a vo sinet gant an alvokad.

5 / Mar c'hoarvez un dizemglev bennak etre ..... (anv ha anv-bihan ar siner) hag ar c'hevredad pe mar ne chom ket arc'hant a-walc'h ken gant Sk-Vzh, e c'hall reiñ da c'houzout ar c'hevredad d'an alvokad ne gemer ket mui perzh er mizoù.

6 / ..... (anv ha anv-bihan ar siner) ha gantañ hepken e vo ar garg da zivizout penaos en em zifenn.

7 / Reiñ a ra e c'her da gelaouiñ ingal ar c'hevredad war an doare ma emdro e deuliad ha war ar perzh a ra d'en em zifenn.

8 / ..... (anv ha anv-bihan ar siner) a aotre ar c'hevredad da zegemer an holl ditouroù diwar-benn-se ha d'o reiñ da vezañ anavezet, d'ar Wask da skouer, en ur zoujañ d'al lezennoù ha da zibarelezh pep doare difenn.

9 / **E degouezh ebet ne gemero Sk-Vzh e karg : ar mizoù justis, an telloù-kastiz, gaouadoù hag interestoù.**

10 / ..... (anv ha anv-bihan ar siner) a ro e c'her da harpañ Skoazell Vreizh par ma c'halla, en e gomzoù ha gant arc'hant, er bloavezhioù o tont.

Graet e ..... D'an .....

Mar n'eo ket ar siner an emvataer :

Anv : .....

Anv-bihan : .....

Chomlec'h : .....

Sinadur :

SKOAZELL VREIZH dileuriet gant e brezidant pe gant un ezel dibabet :

Anv : LOQUET

Anv-bihan : PER

Graet e ..... D'an .....

# GOULENNOÙ DIWAR-BENN AR BRIZONIDI

Deiziad : .....

ANV : ..... ANV-BIHAN : .....

CHOMLEC'H A-RAOK BEZAÑ BET HARZET: .....

TITOUROÙ DIWAR-BENN AR FAMILH (Dimezet pe dizimez, niver a vugale, kargoù tiegezhel all,...). Skrivit an anvioù, ar c'homlec'hioù hag an oadoù mar plij : .....

DEIZIAD GANEDIGEZH : .....

MICHER : .....

DEIZIAD HA LEC'H M'OC'H BET HARZET : .....

DEIZIAD HA LEC'H M'OC'H BET TOULLBAC'HET : .....

HA TAMALLET OC'H BET ? : .....

DANVEZ AN TAMALLOÙ : .....

CHOMLEC'H AN TOULL-BAC'H : .....

YEZHOU KOMPENET GANT AR PRIZONIAD : .....

ALVOKAD DIBABET : .....

Skazell Vreizh  
3, rue A. Briand  
44350 GUERANDE

Nom et Adresse du Crédeur

Nom .....  
Prénoms .....  
Adresse .....  
C.P. .... Ville .....


Nom, Prénoms et Adresse du Débiteur

Vreizh.  
l'Etablissement de mon compte, j'en avertirai Skazell  
Je pourrai suspendre le prélèvement par simple demande à  
de : .....  
le : ..... de chaque mois, la somme  
dernier, si sa situation le permet, un prélèvement mensuel  
J'autorise l'établissement de mon compte à effectuer sur ce

## AUTORISATION DE PRÉLÈVEMENT

N° National d'Emetteur  
402362

Association déclarée conformément à la Loi du 1er Juillet 1901 (J.O. du 24-1-1969)





GARDE

A VUE


\*

CONSEILS

*Avant*

*Pendant*

*Après*



GARDE À VUE ...



9 789069 926742

30 F



# **GARDE A VUE**

## **CONSEILS**

***AVANT***

***PENDANT***

***APRES***



## SKOAZELL VREIZH

### SECOURS BRETON

Comité de Soutien aux familles  
des détenus politiques bretons

Association déclarée conformément à la Loi du 1er juillet 1901  
(J.O. du 24-1-1969)

## BUTS

- Soutenir moralement et financièrement les familles des détenus politiques bretons.
- Soutenir moralement et financièrement les militants incarcérés.
- Régler les frais d'avocats dans les procès intentés aux militants politiques et culturels.
- Alerter l'opinion publique sur les problèmes de la répression politique et culturelle de l'Etat français en Bretagne.

© SKOAZELL VREIZH - 1996  
Tous droits réservés.

SKOAZELL VREIZH

Feunteun Wenn - 3 rue Aristide Briand 44350 GUERANDE - BZH  
Tél : 40.42.92.92 / 40.42.95.20 - Fax : 40.24.81.38 / 96.38.42.65  
Compte bancaire : CMB : N° 15589 56983 00976964044 08

*Nous n'avons pas la prétention de résoudre, dans ce livret, tous les problèmes qu'engendrent une garde à vue. Pour quelqu'un qui ne connaît pas cette expérience, c'est une épreuve redoutable. Notre seul but est de vous apporter quelques éléments indispensables pour que cette épreuve soit le moins néfaste pour vous et votre entourage, tant au plan psychologique que physique.*

*Par ailleurs, nous prévenons le lecteur des risques permanents des moyens de communication. Sans obsession, il faut savoir que votre téléphone, fax, vos déplacements etc... peuvent être surveillés (légalement ou illégalement) et que les résultats de ces surveillances pourront être utilisés contre vous pendant la garde à vue.*

SKOAZELL VREIZH

**GARDE À VOUS!!**



À 20 ANS...

**GARDE À VUE!!**



À 40 ANS...

## AVANT

La garde à vue est un moyen de pression psychologique, policier et légal, jouant sur des phénomènes physiques tels que la perte des repères spatio-temporels, la fatigue, la sensation d'être sale. Pression qui vise à la fragilisation et à l'auto-dépréciation.

Se concentrer pour rester digne, pour comprendre dans quel tourbillon on cherche à vous entraîner, demande d'avoir un minimum d'informations sur ce qu'est une garde à vue et de la difficile gestion que vous avez à faire de ces longues heures, jusqu'à la libération ou au début de l'incarcération.

## PENDANT

Vous avez préparé votre petit bagage et vous commencez le temps de la garde à vue. La garde à vue est réellement une épreuve. C'est le temps où l'on va tenter de vous faire craquer psychologiquement en affaiblissant votre résistance physique, principalement par le manque de sommeil : une planche pour s'étendre, parfois une vieille couverture ; la lumière est permanente, ainsi que le bruit. Dans certains commissariats, vous pourrez vous laver, mais c'est rare. En plus des inquiétudes liées à l'arrestation, la conscience que l'on a de soi, le désir de préserver sa dignité sont sérieusement ébranlés par la fatigue et le manque d'hygiène.

Dites-vous bien cela aussi fait partie du processus, tout autant qu'un interrogatoire.

Autre forme de pression : l'attente, le temps qui

passé. Des heures, des jours à attendre, enfermé dans une sorte de placard (cellule), attendre que l'on vous sorte de là le temps d'un sandwich ou d'un interrogatoire. Tout le reste de ce temps, vous le passez seul avec vos pensées, à guetter les bruits extérieurs pour deviner ce qui va suivre.

Tentez le plus vite possible de vous détendre, de dormir dès que possible. Ne vous concentrez pas sur votre anxiété, pourtant légitime, mais essayez par exemple d'observer ce nouveau monde, à la manière d'un ethnologue, trouvez un intérêt quel qu'il soit.

Salez et fatigué, vous vous sentez vulnérable, humilié... : c'est l'effet recherché ! Résistez !

Si vous faites l'objet d'un mandat d'amener, on vous conduit à Paris devant le juge d'instruction. Le voyage se fait généralement en voiture banalisée ou dans un car de C.R.S. ; voyage pénible que vous ferez le plus souvent menotté.

## APRÈS

Arrivé à Paris, en attendant d'être présenté au juge, vous êtes enfermé au Dépôt, dans les sous-sols du Palais de Justice, pour de longues heures. Le Dépôt contribue aussi à l'affaiblissement de votre résistance psychique : c'est un lieu immense, vieux, sombre, sale, bruyant, carcéral, où vous êtes enfermé avec des délinquants de tous ordres. Comme au commissariat, vous attendez... Ce temps qui passe compte pour vous mais pas pour ceux qui vous détiennent. Pour eux, c'est absolument normal. On vous emmène à "l'identité" : chaque doigt, puis les mains entières dans l'encre, photos. L'identité, c'est aussi le viol de la vie privée, de l'intimité, votre image entre dans les fichiers de la P.J.

Ambiance du dépôt : cris, jurons, appels des

toxicomanes en manque, bruits métalliques des clefs, des portes, des passerelles. Les surveillants sont indifférents à votre sort : leur travail, c'est d'ouvrir et de fermer des portes, de vous conduire d'un point à un autre. On parle de vous, devant vous, à la troisième personne... c'est toujours ce processus pour broyer, déshumaniser.

Au dépôt, le sort des femmes est un peu meilleur que celui des hommes : cellules individuelles un peu plus propres et présence de religieuses offrant un mot de réconfort, un sourire.

Mais indiscutablement le dépôt sent la crasse et la misère humaine.

Pour rejoindre le lieu de votre incarcération, vous êtes transporté en fourgon cellulaire. Ces conditions de transport sont extrêmement pénibles. Essayez de vous décontracter au maximum, de bien vous caler dans le box pour ne pas avoir la nausée (le fourgon peut desservir plusieurs maisons d'arrêt et le trajet peut durer plus d'une heure).

Lorsque vous arrivez en prison, dites-vous que vous arrivez quelque part où vous pourrez vous laver, dormir, écrire, récupérer vos affaires. Ce n'est pas du luxe, ni le meilleur des lieux, mais il faut savoir que vous allez commencer à récupérer physiquement.

Mais avant cela, vous prenez connaissance avec le système carcéral, impersonnel et humiliant. Là aussi vous entendez parler de vous à la troisième personne, on ne s'intéresse pas en premier lieu à la cause de votre incarcération, vos affaires personnelles sont répertoriées et examinées une à une, on vous fait vous déshabiller

entièrement. Il faut savoir qu'en prison, on se déshabille souvent devant des inconnus (à chaque visite, chaque déplacement individuel, pour des fouilles imprévisibles, à la douche collective) ; les vêtements, sous-vêtements, cheveux sont examinés. Lors des déplacements "normaux" (promenade, visite administrative ou médicale), vous êtes chaque fois palpé, mais non fouillé.

Encore un point : le premier ou le deuxième jour de votre incarcération, vous êtes examiné par le médecin de la prison. Vous pouvez commencer à restaurer votre dignité mise à mal en refusant les examens et surtout les anxiolytiques et somnifères qui sont proposés.

Le passage dans la "grande esoreuse" que constitue l'ensemble garde à vue, dépôt, transferts est terminé. Il s'agit maintenant de récupérer, d'essayer de faire positivement le point afin d'appréhender au mieux la suite des événements et le monde carcéral.

\* \* \*

\* \*

\*

## ARRESTATIONS CHRONOLOGIE - DROITS - CONSEILS

### INTERPELLATION

Arrivée de la police munie d'un mandat du juge, permettant une perquisition.

**Conseils :**

- ne pas ouvrir
- profiter pour donner l'alerte
- laisser intervenir un serrurier
- vérifier les mandats des policiers

### PERQUISITION

Exiger qu'elle soit faite en votre présence pièce par pièce.

S'il y a des dégâts lors de l'entrée de la police dans votre domicile ou pendant la perquisition, faites les inscrire dans le procès-verbal.

Dès que la police quitte les lieux, l'entourage doit avoir le réflexe de faire constater les dégâts par un huissier et de prendre des photos. Cela vous permettra de porter plainte par la suite.

### VIE PRATIQUE

En quittant votre domicile pour une garde à vue :

**Prévoir :**

- un sac ou une valise
- un minimum de linge
- trousse de toilette
- une somme d'argent (300 ou 500 F)

papier, enveloppes, timbres, montre  
chaussures sans lacets  
**vos**re dossier médical  
des vêtements chauds  
une carte de téléphone

## INTERROGATOIRES

Donner votre identité.

**L'Article 62 du code pénal vous autorise à garder le silence durant votre garde à vue et devant le juge.**

Si vous êtes bretonnant, demandez un interprète.

## GARDE A VUE

Elle part de l'heure d'entrée de la police dans votre maison.

**Durée :** - une de 24 h

- une prolongation de 48 h = 72 h

- une supplémentaire de 24 h = 96 h :

**c'est le maximum.**

**Droits :** Dans les premières 24 h :

- de voir un médecin

- de prendre ses médicaments (si traitements)

- de faire prévenir son employeur ou sa famille

**Si prolongation au-delà de 24 h :**

**A expiration des 72 h :**

Droit de voir un avocat (30 minutes). Demander à consulter la liste des avocats obligatoirement disponible.

**A expiration des 96 h :** Fin de garde à vue :

- mise en liberté ou présentation au juge

- Si présentation au juge, 3 possibilités :

\* pas d'inculpation et mise en liberté

\* inculpation mais laissé en liberté

\* inculpation et incarcération

- droit d'être assisté d'un avocat

## RÈGLES A RESPECTER

### EN GARDE A VUE

**Votre arme principale est le silence.**

Même si il y a : des témoignages contre vous  
des confrontations avec d'autres  
du chantage et des pressions  
des menaces

**Leitmotiv :** « je n'ai rien à déclarer ». **Se concentrer et ne pas se laisser intimider.**

**Boisson :** eau du robinet uniquement (cas de drogue)

**Nourriture :** évitez de manger (")

**Attitude :** ne pas se lever quand on est fatigué.

Un registre spécial « garde à vue » est ouvert.

- Y sont inscrits : les heures d'interrogatoires  
les heures de repos

Bien vérifier que tout est inscrit.

Si un gardé à vue a une profession qui l'oblige à avoir un fichier d'ordre confidentiel (médecin, avocat, pharmacien), il doit demander la présence pendant la perquisition d'un membre de l'ordre de sa profession comme observateur.

**Si vous devez être présentés au juge :**

Refusez de signer le registre de fin de garde à vue.

Ne signez aucun autre papier.

## SI VOUS ETES TRANFÉRÉ A PARIS

Faites prévenir SKOAZELL VREIZH ou un avocat conventionné par Skoazell Vreizh.

En général, la police et le juge essaient de vous en dissuader. Insistez, c'est votre droit.

### RAPPEL

Tout ce qui est dit en garde à vue ou devant le juge sera retenu contre vous et peut avoir de graves conséquences pour d'autres.

**DONC SE TAIRE.**

Partez avec la conviction forte que vous n'êtes pas coupable.

Quand elle prend fin :

Rentrez la tête haute

Parlez aux journaux, aux radios, à la télévision pour dénoncer votre arrestation

Mais faites attention, vous sortez de garde à vue, vous êtes fatigué physiquement et moralement. Cet état peut modifier vos raisonnements et avoir des conséquences sur l'interprétation de vos propos par les médias.

**Moyen de communication entre l'extérieur et la prison :**

Radio PAYS (Radio BRO) : 93.1 FM

Emissions bretonnes : Le Vendredi de 15 H à 17 H

Le Vendredi de 21 H à 00 H

Le Samedi de 10 H à 12 H

## **I. DEFINITION DE LA GARDE A VUE**

*(Articles 63 et 706-23 du Code de la Procédure Pénale)*

La garde à vue consiste à être gardé dans les locaux de la Police Nationale ou de la Gendarmerie pour y être entendu.

Peuvent être placés en garde à vue toutes personnes susceptibles de fournir des renseignements sur une enquête en cours ou sur des objets ou documents saisis lors d'une perquisition.

L'interrogatoire est le corollaire de toute mesure de garde à vue, mené par un ou plusieurs Officiers de Police Judiciaire qui peuvent se relayer.

Aucun texte ne limite le nombre d'enquêteurs pouvant simultanément procéder à un interrogatoire.

Une question qui se pose d'emblée : Combien de temps peut-on être soumis au feu des questions ?

## **II. DELAIS DE LA GARDE A VUE**

*(Articles 63 et 706-23 du Code de la procédure Pénale)*

- S'il n'existe aucun indice contre la personne gardée à vue faisant penser qu'elle a commis ou tenté de commettre une infraction, elle ne pourra être gardée à vue que le temps nécessaire à sa déposition.

- S'il existe des indices de culpabilité, la personne sera placée en garde à vue pour une durée qui diffère selon la nature de l'inculpation.

### **A. LES INFRACTIONS DE DROIT COMMUN**

La garde à vue dure 24 heures.



Ce délai peut être prolongé d'une nouvelle période de 24 heures par autorisation écrite du procureur de la république (durée maximum avec autorisation : 48 heures).

A l'issue de la garde à vue, les personnes contre lesquelles il existe des éléments permettant l'exercice des poursuites sont libérées ou déférées devant Monsieur le Procureur de la République ou le Juge d'Instruction (dernière hypothèse lorsque les gardes à vue sont décidées dans le cadre d'instruction en cours).

## **B. LES INFRACTIONS A CARACTERE TERRORISTE**

A l'issue du délai de droit commun prolongé, la garde à vue d'une personne soupçonnée d'avoir participé à une entreprise terroriste peut être d'un délai supplémentaire de 48 heures (durée maximum : 4 jours).

Cette prolongation spéciale demandée par le Procureur de la République doit être autorisée soit :

- par le Président du tribunal dans le ressort duquel s'exerce la garde à vue,
- par le Juge d'Instruction saisi de l'enquête en cours.

Cette prolongation nécessite la présentation préalable de la personne concernée au Magistrat autorisant la garde à vue.

\* \* \*

\* \*

\*

Face à une telle mesure, la personne dispose-t-elle de droits ?

Comment peut-elle les exercer ?

## **III. DROITS DE LA PERSONNE GARDEE A VUE**

Faire téléphoner à un membre de sa famille, avoir un entretien avec un avocat à l'issue d'un certain délai, être examiné par un médecin, refuser de déposer, refuser de signer le procès-verbal.

### **A. LE DROIT DE DEMANDER A CE QU'ON TELEPHONE A UNE PERSONNE AVEC LAQUELLE LE GARDE A VUE VIT HABITUELLEMENT OU UN PARENT EN LIGNE DIRECTE, A L'UN DE SES FRERES ET SOEURS, OU SON EMPLOYEUR, POUR LA PREVENIR DU PLACEMENT EN GARDE A VUE.**

*(Article 63-2 du Code de la Procédure Pénale)*

Si l'Officier de Police Judiciaire (policier ou gendarme) refuse de faire droit à cette demande, il informe le Procureur de la République qui peut décider d'y faire droit.

La demande, ainsi que la suite donnée et le numéro appelé, sont inscrits sur le procès-verbal.

Cette communication téléphonique est effectuée par un enquêteur et non par la personne gardée à vue.

Lorsque la personne gardée à vue est un mineur de plus de 13 ans, l'Officier de Police a l'obligation de prévenir le titulaire de l'autorité parentale.

## **B. LE DROIT D'ETRE EXAMINE PAR UN MEDECIN**

*(Article 63-3 du Code de Procédure Pénale)*

La personne gardée à vue peut demander à être examinée par un médecin. Dans l'attente du médecin, les interrogatoires se poursuivent.

Un deuxième examen médical peut être demandé s'il y a prolongation de la garde à vue.

L'examen médical est de droit en cas de prolongation de 48 heures en matière de terrorisme.

La visite d'un médecin peut aussi être demandée par le membre de la famille prévenu.

Elle peut être ordonnée par le Procureur de la République ou l'Officier de Police Judiciaire.

Même si le Procureur de la République ou l'Officier de Police Judiciaire ont fait procéder à un examen médical, la personne gardée à vue, ou un membre de sa famille, peut demander ensuite la visite d'un médecin choisi parmi une liste donnée.

L'examen se fait en général dans les locaux de la Police ou de la Gendarmerie.

Le médecin se prononce sur l'aptitude de la personne à être maintenue en garde à vue. La personne peut préciser ses souffrances et si elle a été frappée.

Si le médecin déclare l'état de la personne incompatible avec la poursuite de la garde à vue, il doit y être mis fin (rarissime).

## C. LE DROIT DE S'ENTRETENIR AVEC UN AVOCAT

*(Article 63-4 du Code de Procédure Pénale)*

A l'issue de la 20ème heure de garde à vue en cas d'infraction de droit commun, ou 72 heures en matière de terrorisme, la personne gardée à vue peut demander à s'entretenir avec un avocat de son choix ou commis d'office.

L'avocat peut avoir un entretien confidentiel de 30 minutes avec la personne gardée à vue après avoir été informé de la nature de l'infraction recherchée.

L'avocat peut faire ses observations écrites annexées à la procédure, mais il ne peut, avant la fin de la garde à vue, faire état de cet entretien.

Si l'avocat choisi ne peut se déplacer (indisponible), il y a lieu de demander à ce que le Bâtonnier en commette un d'office, sinon l'enquête continuera et l'empêchement de l'avocat sera consigné au procès-verbal.

L'avocat n'a pas la possibilité d'avoir accès au dossier et l'enquêteur n'est pas tenu de l'informer du motif du placement de garde à vue, ni des suites probables de la mesure.

Si la garde à vue prend fin avant l'intervention de l'avocat, ce dernier n'intervient pas.

Si la personne gardée à vue ne parle pas la langue française, il sera désigné un interprète durant l'entretien avec l'avocat comme durant l'interrogatoire.

### **\* Droits particuliers :**

Si la personne gardée à vue ne souhaite pas répondre aux

questions posées, elle a le droit de ne faire aucune déposition (*Article 62 du Code de Procédure pénale*).

Autre hypothèse, après relecture du procès-verbal, des mots ou phrases semblent avoir été dénaturés, il est alors prudent de refuser de signer le procès-verbal. Ce droit existe, il peut être utilisé (mention est alors portée au procès-verbal).

#### **IV. DROITS DES PERSONNES DECIDANT LA GARDE A VUE**

L'Officier de Police Judiciaire peut, dans le cadre d'une enquête préliminaire ou de la flagrance, convoquer une personne à comparaître.

Si cette personne ne défère pas à la convocation, le Procureur de la République peut l'y contraindre par la force.

L'Officier de Police Judiciaire peut se déplacer au domicile de toute personne soupçonnée, de détenir des objets en rapport avec le crime ou d'avoir participé au crime pour y effectuer une perquisition (entre 6 heures et 21 heures).

En matière de droit commun, l'accord écrit du propriétaire est requis (enquête préliminaire seulement). En matière de terrorisme, aucun accord n'est nécessaire. Les objets saisis lors de la perquisition sont placés sous scellés.

#### **\* Devoirs des Officiers de Police Judiciaire :**

Le procès-verbal d'audition des personnes gardées à vue

doit indiquer :

- les motifs de la garde à vue,
- le jour et l'heure de la garde à vue,
- l'information donnée sur la durée de la garde à vue et des droits de la personne gardée à vue,
- l'information donnée au Procureur de la République ou au Juge d'Instruction,
- la durée de chaque interrogatoire,
- la durée des repos entre les interrogatoires,
- les droits sollicités par le gardé à vue et la suite donnée,
- le jour et l'heure de la fin de la garde à vue avec son issue.

*P.S : Si la garde à vue a lieu alors qu'une instruction est déjà ouverte sur l'affaire, c'est le Juge d'Instruction qui exerce le pouvoir du Procureur de la République.*

#### **QUELQUES CONSEILS PRATIQUES**

Des écarts de langage servent à intimider la personne gardée à vue sont souvent constatés.

Ainsi, "On placera tes enfants à la DDASS", "Tu vas prendre 5 ans, à ta place je dirais tout".

Dans l'un et l'autre cas, il faut savoir que l'Officier de Police Judiciaire ne dispose d'aucun pouvoir. Le placement d'un enfant relève de la seule compétence d'un Juge pour Enfants et la décision à intervenir suite à l'enquête relève d'un Tribunal après qu'un Juge d'Instruction ait enquêté. Il ne faut donc se laisser abuser par de tels comportements qui ne sont que l'expression

d'un odieux chantage et d'un manque d'éthique.

S'il est également fait allusion à des conversations téléphoniques, il convient alors de demander que les passages incriminés soient lus (écoutes).

\* \* \*  
\* \*  
\*

Les enquêteurs peuvent interpellier à son domicile toute personne soupçonnée, ou sur son lieu de travail.

Cette interpellation peut se faire discrètement, mais malheureusement l'option de la démonstration de la force est souvent retenue (fourgons, gyrophares, nombre important d'enquêteurs durant l'interpellation).

Cependant, aucun texte ne régit les modalités de l'intervention sur ce point.

Cette action relève du pouvoir discrétionnaire du juge ou des enquêteurs qui peuvent invoquer des motifs de sécurité (emploi de menottes, menace d'une arme).

La personne gardée à vue peut demander à ce que les conditions de son interpellation soient retranscrites sur le procès-verbal, mais il ne s'agit pas d'un droit.

La lecture du procès-verbal avant signature est une phase capitale.

Chaque phrase voire chaque mot, peut être déterminant, il est donc recommandé de prendre son temps lors de la lecture du procès-verbal.

Si des passages du procès-verbal ont été insérés de manière outrancière, il faut demander à l'Officier de Police Judiciaire de les rectifier, s'il refuse il est alors conseillé de refuser de signer le procès-verbal comme la Loi l'autorise.

La garde à vue est une épreuve psychologique et physique. L'entretien avec le médecin est l'occasion de décrire son état de santé et d'indiquer si un traitement médical est suivi.

\* \* \*  
\* \*  
\*

CPP : Code de Procédure Pénale

CP : Code Pénal

CR : Commission Rogatoire

## CONVENTION

L'Association SKOAZELL VREIZH représentée par son président et ..... (nom et prénom du signataire) s'engagent à respecter les termes de la présente convention :

1 / L'association SKOAZELL VREIZH est un comité de soutien aux familles des détenus et des personnes mises en examen pour des motifs politiques bretons.

2 / En fonction de ses choix, critères et moyens financiers, Sk-Vzh s'engage à venir en aide à la famille, et aux coûts de la défense en justice de..... (nom et prénom du signataire).

3 / L'Association propose quelques avocats ; si ..... (nom et prénom du signataire) fait le choix d'un autre conseil que ceux avec lesquelles l'association a souscrit des accords de frais et honoraires, Sk-Vzh se réserve expressément de continuer ou non sa participation.

4 / Un accord est passé avec l'avocat quant aux coûts d'intervention à la charge de l'association.

5 / S'il intervient une divergence entre ..... (nom et prénom du signataire) et l'association ou si les moyens financiers de Sk-Vzh ne le lui permettent plus, l'association peut notifier à l'avocat qu'elle cesse sa participation.

6 / ..... (nom et prénom du signataire) aura seul la responsabilité de décider de sa défense.

7 / Il s'engage à informer régulièrement l'association de l'évolution procédurale de son dossier et de la nature des diligences mises en oeuvre pour sa défense.

8 / ..... (nom et prénom du signataire) autorise l'association à obtenir et à faire toutes communications à ce sujet notamment à la presse dans le respect des lois et dans le respect des défenses dans leur diversité.

9 / **En aucun cas, Skoazell Vreizh ne prendra en charge : les frais de justice, les amendes, dommages et intérêts.**

10 / ..... (nom et prénom du signataire) s'engage à soutenir moralement et financièrement dans la mesure de ses moyens Skoazell Vreizh dans les années à venir.

Fait à ..... Le : .....

Si le signataire n'est pas le bénéficiaire :

Nom : .....

Prénom : .....

Adresse : .....

.....

Signature :

SKOAZELL VREIZH représenté par son président ou un membre mandaté :

Nom : LOQUET

Prénom : PER

Fait à ..... Le .....

*Convention valable pour la durée de la procédure*

## QUESTIONNAIRE AU SUJET DE PRISONNIERS

Date : .....

NOM : ..... PRENOM : .....

ADRESSE AVANT L'ARRESTATION : .....

DETAILS CONCERNANT LA FAMILLE (Marié(e) ou célibataire, nombre d'enfants à charge, autres responsabilités familiales, etc...). Veuillez donner les noms, les adresses et les âges si possible :

DATE DE NAISSANCE : .....

PROFESSION : .....

DATE ET LIEU D'ARRESTATION : .....

DATE ET LIEU D'INTERNEMENT : .....

A-T-IL/ELLE ETE ACCUSE(E) ? : .....

MOTIF DES ACCUSATIONS : .....

ADRESSE DE LA PRISON : .....

LANGUES COMPRISES PAR LE PRISONNIER : .....

LE CHOIX DE SON AVOCAT : .....

### Compte à débiter

Codes			Clé
Etablis.	Guichet	N° du Compte	R.I.B.
.....	.....	.....	.....

Nom et Adresse de l'Etablissement Teneur du  
Compte à Débiter

Nom .....

Adresse .....

C.P. .... Ville .....

N'oubliez pas de **signer** votre autorisation et d'y joindre un **Relevé d'Identité Bancaire, Postal ou Caisse d'Epargne.**

Date :

Signature :

**Si vous optez pour le prélèvement automatique, il vous suffit de nous retourner le présent imprimé rempli et signé accompagné d'un relevé d'identité bancaire, postal ou de la Caisse d'Epargne.**

**Nous vous rappelons que toutes les opérations de prélèvement sont gratuites.**



**SKOAZELL VREIZH**

**SECOURS BRETON**

Comité de Soutien aux familles  
des détenus politiques bretons

Association déclarée conformément à la Loi du 1er Juillet 1901 (J.O. du 24-1-1969)



N° National d'Emetteur  
**402362**

## AUTORISATION DE PRÉLÈVEMENT

J'autorise l'établissement de mon compte à effectuer sur ce dernier, si sa situation le permet, un prélèvement mensuel le : ..... de chaque mois, la somme de : .....

Je pourrai suspendre le prélèvement par simple demande à l'Etablissement de mon compte, j'en avertirai Skoazell Vreizh.

Nom, Prénoms et Adresse du Débiteur

Nom .....  
Prénoms .....  
Adresse .....  
.....  
C.P. .... Ville .....

Nom et Adresse du Crédeur

Skoazell Vreizh  
3, rue A. Briand  
44350 GUÉRANDE